

Kemennadenn « Frankiz Evit Maian » da holl vediaoù Breizh

« Demokratelezh evit Breizh ! »

Ni, stourmerien Frankiz evit Maian, a embann bezañ digabestret delwenn Maian ti-kêr Kemper, arouez an demokratelezh gwallgaset e Breizh.

E penn-kentañ e oa bet savet ar Republik war mennozh hollvedel hag arakour bet broudet da goulz Gouleier an triwech'het kantved. Fellout a rae d'an dud krouiñ ur gevredigezh nevez, kas d'an traoñ dreistgwirioù un nebeut hiniennoù hag embann emañ an holl dud kevatal an eil re ouzh ar re all a-fed lezenn. Disoc'h un hir a hent heuliet gant Mab-Den adalek Platon betek Rousseau en ur dremen dre Washington ha Paoli evit ma vefe gouest pep hini da ren e vuhez diouzh e wellañ. Met e lec'h an holl bennaennoù reizh-se he deus gwelet Maian he mennozhioù droukimplijet ha pep tra o vont a-dreuz er Stad C'hall.

Peseurt frankiz a c'hellfe bezañ pa vez miret ouzh ar Vretoned da vezañ mestr war o dazont ha da ziskoulmañ o c'hudennoù evel ma fell dezho ? Peseurt ingalded e c'hellfe bezañ evit ar brezhoneg hag ar vrezhonegerien na n'eus lezenn ebet a-zevri e bro « gwirioù Mab-Den » evit ma c'hellfent ober gant o yezh ha treuzkas anezhi war-un-dro ? Peseurt demokratelezh a c'hellfe bezañ pa vez nac'het krenn lakaat ar gaoz war adunvaniñ Breizh pe c'hoazh pa vez grataet gant an danvez-prezidant ober e seizh posubl evit peursinañ karta Europa ar yezhoù minorel ha kerkenet ha dilennet, gwelet an aotrou-se o treiñ penn d'e vazh difoutre hag evel-se tonkañ ar brezhoneg da vervel ?

Hed-ha-hed he buhez he deus gwelet Maian rummadoù a Vretoned o sevel evit ma vo doujet ouzh o gwirioù. Amañ e Kemper e oant c'hoazh miliadoù warlene o c'houlenn groñs ma cheñcho an traoù e Breizh. Mantret ha feuket bras eo Maian o soñjal er bolitikourien a-gleiz pe a-zehou a oa o paboniñ e penn an dibunadeg-se... hag int hag ankounac'haet o c'homzoù cheuc'h ur wech dilennet. Maian zo badaouet mik o welout pegen « kalonek » eo kuzul Kemper hag en deus kredet votiñ ur mennad da bediñ François Hollande da seveniñ ar pezh en doa grataet... hag e keit-se emañ ar sitoaiian Poignant o lojañ e palez an Elysée daou zevezh ar sizhun, hag eñ kuzulier personel ar prezidant, hag ne ra mann ebet !

Maian gwallgaset, Maian haniet, Maian erru poazh an ui en he revr, resped deoc'h... met Maian dishualet a benn taol fin a-drugarez d'un toullad keodedourien hag o deus klevet he galv o tasoniñ dreist ar praeier hag al lenneier. Ha deredet o deus a yezh korn eus ar vro evit he skoazellañ ha reiñ ul lañs nevez dezhi. Rak ni, stourmerien ar FEM, a zo bet maget gant an hevelep hengoun republikan evelti, hollvedel hag arakour, pell diouzh skeudenn ar c'hilhog gall war e bern teilh a zo bet staget outi betek an deiz a-hiziv. Hag asambles ganeomp emañ-hi! Maian Gemper eo an hini gentañ oc'h ober un tamm diluz d'he divhar da c'hortoz ez afe re all da foetañ bro ganti. Ha war hentoù skol-louarn ar Republik e kan Maian hag an FEM a-bouezh-penn war ton ar gavotenn:

« Didostait tud yaouank hag ar re gozh ivez,
Stourmerien a Vreizh, ha c'hwi ar vugale,
Selaouit ar sonenn-mañ savet a-nevez
Evit dazont hor bro krogomp e-barzh hirie ! »

Setu, e berr komzoù, stagomp holl ganti ! Roomp d'an holl Vaianed ar banne sklêrijenn e c'hortozont abaoe keid-all, skubomp ar bouldrenn a-ziwar o divskoaz ! Gant ar spi e ouio ar Republik cheñch emzal'h buan-ha-buan e keit ha ma vo Maian o vakañsiñ... Rak daoust dezhi bezañ mut , n'eo ket na bouzar na dall, ha trawalc'h a zrouk a zo bet grataet evel-se dindan hec'h anv !

Frankiz d'an holl delwennoù Maian ! Demokratelezh evit Breizh !